

Au fol° 68 recto, seulement le titre :

(68 recto)

ar Godisserez.

[rien aux fol° 68 verso et 69 recto.]

(69 verso)

Ar Godisserez.

Merc'het iaouank, en gwirione
Mert d'unan na ret promesse.

An hini rei da daou pe dri
Al iel d'an ifern da leskiñ.

An hini rei da dri pe pewar
Al vo danvet hep e nep mar.

Al vo deus Doue distag a gren
Evel eur Skour deus eur woën.

En en dont deus al leur newe
Me a moa groet seiz promesse.

Seiz promesse e moa me groet
Kerkoulz mije groet an eizvet.

(70 verso)

Da Seis den iaouank a moa touet
Kemerjent hane wit friet.

Jam Gornek wa bars em genou
Chober widon promesseou.

42

Fa wa gant ar hent o vonet
eur varegour en eus Kavet :

— Plac'hek iaouank, dime leret,
Trezek pet bro vel se e c'het ?

— Me a ia breman da Wengamp
Da breman 'n allianz ar chant

A newze da breman eur ruban,
Ganac'h, Kavaler, zo unan.

— Ma ruban o po mar Keret
Mar Keret bean ma fried,

Bean groek dime ewit mad
hag hen sinan din gant ho goad.

(71 verso)

Sinan din gant eur benduen
E vefet din ewit biken.

— Plijout 'wallac'h ra ho fesson (1)
Chetu arze ma dorn, mignon.

ha dilun gentan mar Keret
Otro Kabitèn vo' hon eured ;

Eis Kemener a zo em zi
O ch ober eur habit newe diñ.

Ar choas marteze a vo nao
Red veo d'ho kroek bean faro.

—
Peneres ar Wern a levere
Er ger de douç pa n' arrie :

(72 verso)

— Deus gane duman d'ar jardin
D'ober eur boket louzou fin.

(1). - Le ms. a ; fesson.

— Merc'hek iaouank, ma exkuzet
D'ar jardin ganac'h na nin ket.

Rag ar jardin zo biniget
Ha c'hui ha me, nin na nomp ket.

Er jardin zo eul louzouen
Zo c'hano Jesus war he fen

hano Jesus zo war he fen,
hano Mari war he delien.

73 verso)

— Ma mam, mes aon c'hon mantet
Komer kennes evit fried;

he visac'h plij d'in arwallach
Med he dreit zo vel dreit eur march.

— Laret moa dach, ma merc'hek koant,
Choss eur fried herve ho c'hoant.

Tolet plê pe choazet unan
Ho Kasfe da lestiñ dan tan.

Pa n'antreent dre an hor vrab
An dud a eured a wa flam bras.

Dre m' antreent bars an iliz
Te n'ho c'herchen eur vrumen vis.

74 verso)

Ben m' arrijont d'ar balustrou
E waïnt ho daou du evel glaou.

Er Belek iaouank a c'houlene
Deus Penerez ar wern neuze:

— Merc'hek iaouank, dime laret,
Petra ganac'h zo harriet?

Petra ganac'h zo harriet,
Du ho Kavan vel er pechet.

44

— Belek iouank, mar em c'heret
Er stoll em c'her'hen a lekefet,

Me sant er vero bars em eskern
Mes aouen c'hon a vont dan ifern.

Me sant an tan em daoulagad
A c'han da d'evin Kik ha goad.

—
N' wa ket e gir perachuet
An douar d'ho greit zo diorret,

(75 verso)

Seiz leo trio rond a we kleowet
Gant eun drous effroyab mewbet

We kleowet penneroz ar wouern
O Koëan 'n fons peus an ifern.

—
)

[pas de trad. franç.]